

AR VESVENTI

VAR EUN TON NENEZ

Kanomp brema ar ganouen,
 Divar-benne an oll vesverien,
 Evit ma gle vo pep hini
 Ar virioncz hep damanti.

Kouskoude me her goar er-vad,
 Am bo out-ho eur goall-grogad,
 Pa zint tud fur var ho meno.
 An oll dle kemmer shouer out-ho

Kos ha yaouank, paour pinvidik,
 Hotez int dre nerz ho bannik,
 Hag ann dud kreva gouziieka,
 Enu ho c'hichen ne d'in netra !

Mar deo mestr en he diegez,
 N'euz ket he bar eun he barres :
 He gezek he zaout eme-z-an,
 Zo ar re vella er vro-man.

Pa vez oc'h' eva odivi
 N'eus kear ebet par d'he hini
 Labouret mad he zouarou,
 Teot keit ha hen enn he brajou.

Epad em ma o fougeal
 He dud ep gear ra troiou fall.
 Hanter amzer labouront ket ;
 Kentoc'h ez ai da glask he voued.

Bet eo eun amzer pinvidik.
 Brema nemet gle he gearik
 D'eus fors enn devez vo guerzet,
 Mezo c'hoas a vezo guelet.

He c'hreg hac he vugaligou.
 A vo dizolo ho memprou.
 O klask ho zamm ama-a-hont.
 Diran-s-han grenn gant ar spount,

Anu ezezh troet da vesvi,
 Ema diout-ha stag pep si :
 Evit sellet ouz ar gragez,
 Lezomp anezho a gostez.

Eur c'hreg zo troet da eva
 Enn he zi a vanko pep tra
 Eleac'h prena pebr ha hoalen.
 Va gaign a lipa ar veren.

Arc'hant al leas hag an amann,
 A ia ganti e guin-ardent ;
 C'hoas pa so out-hi gouennet
 Chann ar zouben n'eo ket sallet

Deoc'h m'oa diounjet ann hoalen
 Varc'hoaz me z'ai d'an oferenn
 Ro d'in uun ugent real pe zaou
 Ezomm am euz kals a draou.

Hi devoa eur pezh kik kuset,
 Hag arc'hant oa d'hezhi roet,
 Laouen ia d'an ofern vintin,
 Hed ann hent ra met mousc'hoarzin

Kenta tra ra guerza he c'hik,
 Goude ev daou pe dri bannik
 Ha pa erru as eun iliz,
 E oar gant hanter ann offis.

Goude ive oa daou monet
 D'eva gand ar gommercez,
 Ha ne zonj ket et tud he zi
 N'he bugale deuz em out-hi.

He bugale a zo en noas,
 A luv en dro d'ar vates vraz
 Unan bihan zo er c'havel,
 Gant ar zec'hed prest da vervel,

« Poent oe c'hoc'h mont d'an ofern bred
 « Prenit, matez ar pezh zo red,
 « Ha digassit va greg d'ar ger.
 « Abalamour d'am buge! ker !

Ar vates, eur gristenez vad,
 A visk buhan he zamm dillad,
 A glev er vorc'h ann oferenn,
 Hag a bren oll pebr ha hoalen.

Mont a ra da glask he mestres,
Man hostalerie zo mesves ;
Mes mont d'ar gear eo ar goassa,
Pa ne ell mui chom enn he za !

Var bouez paka kalsik lammou.
Dizec'het eunn tamm enn hentchou
Gant he matez œ distlejet,
Da gaout he bugel dideoted.

Kals grages a ai drok enn-ho,
Ac d'in-me sur a lavaro
A vezo geir ar zon-ma.
A venn atao klask ho dual.

Guelet am eus meur a gini,
Eur veach en em roet da vesvil
O versa al lars, an amann,
Ha laeres ed da gaout arc'hant,

Betek dillad ho bugale,
A raen evit eur banne,
Rochet an ozac'h zo guerzet,
Er chous larfen eo kollet !

Guelit klaskarezet bara,
Petra reont da gaout da eva ?
Lesel gant ann naonn da c'hlaouri
Ho bugalegou enn ho zi.

Alies z'eont d'ober korfad,
Gand aluzennou an dud vad,
Mes piou bennak ho zamallo :
« Zo dek guech falloc'h emc-z-ho. »

Var ne-zho me ia da devel,
Vit koms euz mates ha vevel.
Rak en ho zouez, a zo ive,
Hiniennou gar ho banne

Ar mervel mezo a lavar ;
Er barres-ma n'euz ket ma far,
N'a da vedi na da falc'had,
Na gant kezek da charread.

Eus ar foariou, ar pardonioù.
E zeu d'ar gear a chourlammou,
Hag he zillad na vent met pri.
Her c'hlever c'hoas ho fougassi.

Al lœned paour da Zul, da lun,
Ous ano noz alies renkin yun,
Pa ve mezo ar mevelien,
An ozac'h chomet er vouillen.

Merc'hed yaouank gemmerit ket,
Evit pried mesvier ebet ;
Evit-han da gaout arc'hant, aour.
Eurus soc'h vec'h kichen eur paour.

Gant mevel fur n'en deus netra.
Neur labourad ho po bara,
Leac'h e kichen eur mesvier,
O riska ar vuez e vezer.

Potret yaouank kos ve guelet,
Deut var an oad, o klask ho bouet.
P'ho d'euz re garet ar veren
En tu ali d'ar pez a dleent.

D'ar goazed, larann kenavo,
Breman mitisien, ma hô tro,
Ne gredann ket gavgac'h diez,
Ma flipann ar viesvrierez.

Enn ho touez zo meur a him.
Gar ar c'hafe, an odivi,
Hag avechou evont ive,
Siouas d'ezho eur bannik re

Gouslcoude meus guelet eun dra,
Epad ma vent klask fortuna,
Dirac goazed reont chestou :
« Ni ne garomp ket ar banneou.

Padal ma kredfen lavared :
Goazed, brassoc'h c'hoas diskennet
« Ni merc'hed hon eus sec'het braz
« A dra laromp ec'h menargas.

Eur veach evet daou tri banne,
Ar re all a ziskenn eas tre,
Ar goad a veler zay d'ho fenn,
A fors da skarsa ar veren

Ar rozera, ar gousperou,
A ganomp brao euz ann doliou,
N'eus ors dies vo mont d'ar ger
Gouca ra ho divesker.

Merc'hed yaouank mesverezed,
Vila tra a c'heller guelet.
Ho-unan gollont ho brut vad
Enor ho mam, hini ho zad.

Den ebet sur n'eo eureujo,
Nemet paotret henvel out-ho,
Ha guelet vo ho bisachou.
Bronduet dre nerz an toillou.

Perak ve trous ken alies,
Ti ar mesvier, ar vesveriez ?
Abalamour a vent klask gout
Piou a eva muia lagout.

Mesvierien ha mesvrierezed,
Me n'am eus ket ho tikriet ;
Rac ann tau-goat ebars en ti,
A zo guell eguet mesventi.